

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù - Dañs a-benn

**An troc'herien lann**

Pa vezemp o trec'hiñ lann, war lein Menez Are  
O ya ni a sante c'hwezh, ya ouzh merc'hed Kerne

Me am eus bet troc'het lann, ha graet reñkajoù uhel  
O ya me a assur deoc'h, ned aent ket gant an avel

Me am eus graet kargoù lann, hag en deze kerden  
Merc'hedigoù ar Fouilhez, taolche warno ur sell

E Kerne 'z eus douar mat, douar lann ha prajoù  
Douar koad eus ar c'hentañ, kalz a wezh avaloù

Ar Gerneiz a neus chistr, da derriñ o sec'hed  
Ni a golle hon c'halon, gant chistr ar gleskered

Betek pa 'z omp komañset, gwelloc'h ni a bado  
Hag hon c'halon en hon c'hreiz, o biken ne vanko

Ma 'z oc'h bet ur wech bennak, e foar Landivizio  
Eno 'z eus chom merc'hed yaouank, machinoù blevek ganto

Ar re-se a vez ganto, ledan war o div skoazh  
Hag o soñjal marteze, kaset ganto ur gwaz

Evidon me a lavar, pa 'z in da glask ur vaouez  
Ne ket dav klask ur penn blev, da zigas un estrez

*Antoine Henry, Jean Martin et François Louis Tanguy enregistrés dans un film  
documentaire par l'ACAV de Saint Cadou vers 1990.*